




PHOTO JOS LE DOARÉ

Eun ti nevez e Plougerne

BLEUN-BRUG

Niv. 111 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

MEZEVEN 1958

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur koum. a enor — 1.000 lur koum. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**
Mar fell deoh beza ezel euz ar Bleun-Brug pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist

C. C. P. 544.22 Nantes

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

TAOLENN

1958 : Kantved bloaz kurunidigez Itron Varia Rumengol, gand	
L. B.	1
Gouel dibab ar Bleun-Brug e Plougerne, gand K. Brisson.....	2
Gouel dibab ar Bleun-Brug e Kleder.....	3
An deñved dianket, gand Job Séité.....	4
Eun dro-’furchal e Sant-Tegonneg, gand L. Lok.....	8
Kontadenn Bizai, gand Mab an Dig.....	11
Keleier	15
Ar galonad, gand Yeun ar Gow.....	17

Deut eo er-mêz niverenn 6 « Les Cahiers du Bleun-Brug ». Ar houmanant da « Bleun-Brug » ne dalv ket evid reseo « Les Cahiers du Bleun-Brug ». Evid o haoud, skriva da : **Jean Cormerais, Professeur au Lycée de Garçons, Rennes. C.C.P. 77.60 Rennes.**

Koumanant-bloaz : 200 lur.



133860

1958 : Kantved bloaz kurunidigez Itron Varia Rumengol

P'ema miz Mae, miz ar Werhez, o teurel war on douarou e vous-c'hoarz diweza, Sul an Dreinded a zigas deom adarre pardon braz Rumengol, ar pardon ken karet, an hini — euz oll bardoniou or Breiz — a zo sanket an dounna ar gwrizioù anezañ e noz an amzeriou tremenet, hag ive e kalon ar Vretoned devot d'an Itron Varia.

Kalz traou a zo cheñchet, kouezet, en or-hornig bro, evel e leh all, a-dreuz ar hantvejou. Eun dra da vihanha a zo chomet heñvel ouz ar peñ m'eo bet hir vloavezioù 'zo : bez' ez eo pardon Itron Varia Rumengol, a gaver ennañ skoulmet, ha beo bepred, kosa ha pouezusa kreden-nou kristen or gouenn, ar memez feiz, ar memez karantez evid Or Zalver hag e Vamm.

Pardon Rumengol, setu amañ ar peñ a skrive diwar e benn eur gaze-tenn er bloaz 1869 : « Ar pardon-ze, evitañ da zond beb bloaz, a zo atao gortozet beb bloaz gand mall, a laka estlammet beb bloaz ar re a deu dezañ. Eun dra bennag euz an neñv a zo er pardon-ze, rag morse ne deu da enoui, da skuiza, ar re hen darempred, atao her haver kaerroh kaerra, beb bloaz... »

Ha n'eo ket ar peñ e-neus c'hoantaet diskleria an Ao. Guillou koz, p'e-neus savet ar hantik dispar, na skuizer ket kennebeud o kana ?

« N'eus elestrenn ebed er prad
A daolfe kemend a hwez vad ;
E Leon, Treger ha Kerne,
Ganeoh e klever c'hwez an ne. »

Lavared a hellom euz Rumengol ez eo eun douar santel. Santel, da genta, o veza ma 'z eo bet plijet gand an Itron Varia diazeza warnañ tron he madelez hag he galloud. Santel, da eil, dre ma 'z eo bet glet-pet gand daelou milierou, ha kant-milierou a belerined, a zo deuet di, a vloaz da vloaz, a-hed an amzeriou, da zaoulina ha da zibuna d'o Mamm euz an Neñv, o misteriou a hlahar hag a levez.

E testeni euz o doujañs, o harantez, o anaoudegez-vad, Bretoned 1858 o-deus, gand aotre An Tad Santel ar Pab, lakaet war benn Itron Varia Remed-Oll, ha war benn he Mabig Jezuz, eur gurunenn aour.

Atao, ken tomm ha ken birvidig o halonou, Bretoned 1958 a yelo, er bloaz-mañ, niverusoh eged biskoaz, da zispenn roudou o zadou, ha da embann, da beb ekleo, pegen laouen int euz ar peñ a zo bet greet kant vloaz 'zo. Ar Vretoned, muioh eged biskoaz, a laka o fiziañs e Itron Varia Rumengol.

Ra blijo ganti o ren bepred war hent ar wir furnez hag o derhel leal d'o brezoneg ha d'o feiz.

L. B.

Gouel dibab ar Bleun-Brug e Plougerne

Ne oa ket gwall-domm en deiz-se. Diwar greh an duchenn m'ema savet ar vourh warni e weled duhont ar mor glaz-leñval — eul liou dreist ordinal em-eus dalhet ar zoñj anezañ — hag an houlennou a oa gwenn o hribell dindan an avel foll.

Koulskoude e porz-skol Sant-Josef Plougerne e oa bodet niveruz ar vugale, o halon o lammad eun tammig e-sell an abadenn da veza. Kenta tro e oa da veza eun devez « dibab » evid kanton Plougerne. Red eo gouzoud e 'oa deuet re vraz niver ar vugale o kenstriva beb bloaz er Bleun-Brug ha neuze e oe divizet gant Komite Bleun-Brug Leon sevel « dibabou » dre ganton. Er bloaz-mañ e vazo tri euz ar seurt-se : e Plougerne, e Kleder hag e Lokournan-Leon. Marleze e oa eun tammig enkrez e kalon an Ao. Seite hag e genlabourerien : petra vije an devez-se ? Mistri skol : beleien, frered, seurezed, ha laiked a oa deut da zikour anezo evid' se.

War-dro eiz eur hanter e stagjom gand al labour : dibab e-touez bugale pemzreg skol. Ar re wella, ar re houesta da vond da Zant Tegoneg. En em gavet e oa eno : Plougerne (merhed ha pôtre), Lanniliz (m. ha p.), Treglonoù (m. ha p.), Kerniliz (m. ha p.), Lannarvili (m.), Gwiseni (m. ha p.), Lesneven (m. ha p.), Ar Grouaneg (m. ha p.) : daou hant pevar a vugale en oll. Kant unneg evid ar han ha trizeg ha pevar-ugent evid an displega. Dirag seiz juri e tremenjont, eur mell labour, m'hel lavar deoh ; eul labour plijuz avad rak kanerien ha displegerien euz an dibab a zo bet kavet en o zouez. Ha n'oad ket evid miroud da zoñjal n'eo ket maro hoaz or brezoneg. Feiz ! n'eo ket p'her hleber distagellet ken brao war muzellou bugale 'zo.

An hini e neus kemeret perz e feson pe feson en abadenn-se a zo bet laouenneet e galon o weled kemend se. Hag ar yaouankiz en he barr ne ra ket fae war draou Breiz kennebeud : e'hwéze den braz a zo bet dirag eur juri ; kana pe gonta o deus greet, hag en eun doare dispar — Dond a reas brao-tre gand eun den koz — ouspenn tri ugent bloaz — son Pañch ar Marichal.

Deg eur ! Poent eo tostaad evid an overenn-bred. Gwerz sent vihan Plougerne a zo hizio. Hag an Ao. Planteg a ziwar e gador-brezege a laka tro en abadenn : ma n'ho peus ket gweled kemend all, kit da weled ! Meur a hini a gavo abeg e kement-se ; a hell beza ! Koulskoude, daoust hag-eñ n'eo ket feiz on tadou koz deuet beteg ennom ? Ar giziou a vremañ a ra fae war ar giziou koz hag evelato... an diabarz an hini eo ema ar gwir gantañ.

Tud Plougerne a zo tud a feiz, anad eo ; na pa ve en o doare kana an overenn. Gand evez braz e selaoujont ouz mouez an Ao. Job Seite a roas deom eun tañva euz or yez flour, yah a dlefe aliesoh koteza diwar-lein ar gador-brezege en or Breiz-Izel. « Va bro a zo du-hont... » ha da tleennou dispar or horn-douar da zifrolla dirazom.

Da deir eur e tigure an abadenn e sal ar Patronaj. Eno e oe klevet ar gwella kanerien ha displegerien bet dibabet diouz ar mintin ; eun dudi — Plou a hellfe chom dizeblant dirag ar plahig-mañ a bevar bloaz o kana deom « Va lapousig bihan », ar pôtr dilu-se o displega « Ar hemener hag an diaoul », hag ar plah yaouank hont a zav didro ha flour he mouez pa gan « Allhwez an eürusted ». Tri hant bugel a dremenas a strolladou iyez war al leur-hoari evid ar han ! Eun dra nevez hag a raio, mil vad da vugale Breiz.

Ne oa ket nemed se'led ouz an dud, dedennet gand kement-se oll, ouz ar vugale, reiz, sioul, lod anezo bodet a dolpadou en-dro d'al leur ; hag ar youhadennou a loskent da beb skeudenn a oe diskouezet dezo war an « écran », — souezet ma 'z oant — rag, red hen anvaz, an Ao. Seité a zo eur mailh da denna skeudennou-film euz ar re gaerra : gwelet on-eus bet o-mod-se manati Landevennec ema ar veneh o paouez sevel, hag ar vugale eet ar maout ganto warlene e Bleun-Brug Lanniliz. Ha da echui kanerien Plougerne n'ema ket o brud d'ober.

Pep hini a skoas laouen warzu ar gêr, ar vugale ganto bep a ziplom — diplomou moulet kaer — ha levrioù brezoneg pe galleg diwar-benn Breiz.

N'on ket bet miroud da drei pell pell em spered ar zoñj euz an devez-se, ha da lakaad keñver-ha-keñver eur seurt labour gand an hini a vez greet e Bro Gembre gand or breudeur tra-mor — Berz braz o-devo an devezioù-se — muiol eged ar Bleun-Brug braz e-touez tud ar bobl — hag beti a ran en em skigno dre Vreiz a-bez. Gand ma vo kavet stankoh-stanka tud a youl-vad ha don enno karantez o bro da gas ar zoñj mañ da vad.

N'am-eus ket nemed lavared Bennoz Doue d'ober ken ; Bennoz Doue da Blougerneiz, beleien ha parrezianiz, Bennoz Doue d'an Ao. Seité, d'e genlabourerien, Bennoz Doue d'ar vistri o-deus poaniet da brepari ar vugale, Bennoz Doue d'ar vugale — ya, d'ar vugale dreist-oll, daoust ha n'eo ket ablamour dezo he-deus « bleuniet al levezeg » en deiz-se e kalon or henvroiz !

Gouel dibab ar Bleun-Brug e Kleder

Renet e oa an devez-mañ gand an Ao. Berthevas, Mèr Kleder, hag an Ao. Calvez, person ar barrez.

Ar henstrivadegou, e skol ar seurezed, a vodas, a-raog an overenn-bréd, 192 a vugale, paotrezed, dreist-oll, evid ar hana hag an displega, a unanou, o fond euz dég skol diwar-dro. Meur a germes, er parrezioù lost, a viras meur a skol all da zond. En eur gonta ar re a ganas a strolladou, e heller lakaad da 300 niver ar genstriverien.

5 jury, a gasas deread, al labour en-dro : 3 evid ar han, ha 2 evid an displega.

En oll overennou, evel e Plougerne, an Ao. Job Seite, aluzenner B. B. Leon, a zisplegas en eur brezoneg c'hwég ha flour, pegen réd ez eo d'ar Vretoned, chom feal da herez santel en Tadou, hep beza, daoust da ze, tud diwar-leh : ar hontrol eo.

An han, e-pad an overenn bréd, a oe kaset dispar en-dro, gand Koral Kléder, dindan renadur ampart an Ao. Lannon. Kantig on Aotrou 'n Eskob Fave a oe kanet e peder mouez : « Ni ho salud, o leun a hraz ». Kendoniet eo ar hantig, gand an Ao. Lannon e-unan.

Goude ar gousperou, er patronaj, e oe roet da houzoud gand an Ao. Gourmelon rener-skol e Goueznou renkadur ar vugale, dre skol, roet beb a briz d'ar re genta, ha beb a daolennig d'an oll.

Ar re wella euz pep seurt a bignas war an teatr, dirag eur zal leun-kouch, evel e Plougerne. Evel-se e oe plijadur o klevet *Mari Kemener* euz Plounevez-Lokrist, 7 vloaz, *Perig Seite* euz Kleder, 8 vloaz, o kana « Al labousig bihan » ; *Jeanne Jezequel*, euz Plounevez, o tisplega « Eured al laouenanig » ; *Renée Azou*, euz Ploueskad, ha *Mari-Tereza Roudot*, euz Plabenneg, o kana « Ar haz koad » ; *Mari Kread'h*, euz Ploueskad ha *Raymond Burel*, euz Plougoulm, o tisplega « Ar yarig he viou aour » ; *Eveline Le Got*, euz Gwinevez, ha *Mari Ily*, euz Kleder, o kana « War vordig an dour » ; *Mari-Louise Mear*, euz Sibiril, ha *Mari-Tereza Herry*, euz Gwinevez, o tisplega « Ar Hemener hag an diaoul ».

Me hel lavar deoh ne oa dén inouet, er zal, o selaou ar vugale-se, ken kaer o mouezioù, ha ken distagellet o zeod, kén e chome soñezet mlk ar gerent.

E-doug an abadenn-mañ, e oe konkour kana a strolladon. Seiz strollad a oe klevet ha barnet gand eur jury a 5 ezel : an Aotrounez *Stephan*, rener-skol e Kastel, *Gwian-varc'h*, rener-skol er Grouaneg, *Uguen*, kelenner e Lesneven, *Lanon*, beleg e Kleder, hag an Ao. *Cornic*, noter e Kleder. — Eun dudi e oa klevet an oll vugale-se o kana, ha nehet braz ar varnerien ouz o renka. Kleder, Ploueskad ha Plabenneg a oe kenta, eil ha trede.

Klevet e oe ive re vraz, evel *Kristlana Salaun*, euz Lannarvili, *Mari-Louiza Uguen*, euz Plouneour, ha *Martha Abalan*, euz Plouenan, hag eur ganérez a ouspenn 70 vloaz euz Kleder, a ganas « Gvechall goz ha bremañ ».

An Aotrou Person a drugarekaas neuze ar re oll a gemeras perz en devez kaer-se ; an Aotrou Mear a lavaras e joa o weled an traou o vond ken mad ha ken brao en-dro gand ar Bleun-Brug hag a houlennas digand ar vugale beza lorch enno gand Breiz hag ar brezoneg.

Taolennou a liou, hag a biljas eston d'an oll, o oe diskouezet evid echui, gand Visant Seite, diwar-benn Landevenneg, Bleun Brugou 1957, ha Kleder.



AN DENVED DIANKET

gand job séité

« Kenavo, paotred ! Evidom-ni a zo o vond da glask fortun pellohig. »

Hag on daou grennard, dezo seiteg vloaz a-veh, a zilezas o mignoned war blasenn gar Landerne.

En hent edont evid ar skol, evel ar re all, med diouz ar pardaéz, tres ebed anezo mui, nag er skol, nag e Landerne. Nijet oant, on daou lapous, war-zu n'ouzon ket peleh.

Hir e kavent o amzer, tenn o labour, inouüz o buhez. Entent a reent beza daou baotr gouest bremañ, gwazed na petra 'ta, peogwir o-doa dija marblu dindan o fri. Chom da loueda etre muriou ar skol a gavent iskiz ha dinatur. Deuet oa evito an etre da zigeri o diouaskell, da gemeroud hent ledan ar frankiz.

Daoubleget war o levriou, er skol, o-doa bet amzer da zoñjal, hag en o empenn o-daou, oa dinodet eur menoz kaer, a gave dezo, eur menoz a zallhent kuzet ouz an oll.

Eur bern soñjou o rodella en o spered, on daou ganfart a zante ar gwad o virvi enno, preset da gemeroud e lañs. Da betra chom er skol ? da goll amzer, da goll arhant ! Pounner a-walh oa o skiant bremañ, ha neuze, piou a gredfe dislavared an dra-mañ ?

Da betra sanailhad traou er spered ?

An dra-ze ne viro ket ouzit chom dilabour.

Avañsetoh e vezi ma n'ez-peus ket da voued ! Hag e vefe en da benn eur harrad jeometri ! Hag e vefes ouspenn barreg da jedi !

Ha c'hoant az-pefe da gempenn douar, daoust hag evid se eo red deski chimi ?

Konta 'zo mad ! deski ! ma n'eo ket pout da spered !

Terri ar penn gand kudennoù luïet ha diluïet a zo gouest da lakaad ahanout da vond e belbi !

Ezomm ebed euz kement-se marvad !

Laer ha trafikker a hellez beza atao avad.

Setu va menoz ha va zoñj war ar poent-se.

Me 'ra foutre kaer, sur, euz an oll draou-ze !

Ma kavit plijuz chom deg vloaz er skol, war goll, da blanta traou en ho penn, me avad n'on ket foll !

Setu ar pezh a zoñje on daou baotr yaouank er skol, en tu bennag e Breiz-Izel. O anioù : Karlos ha Mikael. On daou abostol o oa inouet maro. An dremmwel a gavent atao loued ha teñval, ar mor, a deue beteg ar skol, sinka-nuz, muriou o frizon, gwall enk ha striz, an urziou, kaled da heuilh, kenteliou ar vistri, ranell ha dizaour, ar hloh, eun torr-penn da glevet.

Kredabl braz Karlos a zante o virvi ennañ gwad e dadou koz. Ar re-mañ, douaret gwechall war aochou Breiz-Izel, a zeue euz Bro-Spagn pe an Afrik. Marteze, e tassone en e greiz galv kevrinuz ar Sahara, hag e spered a rede moarvad war-lerh douarou divent heb harz na kleuz, war-zu ar plénennou tréz du-hont dindan an heol bero. An aot a oa dirag ar skol, pa 'z ee ar mor war e hiz, a zigase soñj dezañ euz ar vro-ze, dreist-oll pa wele an tréz o nijal gand an avel. Ar pezh a zo sur, eh huñvree war-lerh eun oabl heb kounoul na malkenn, war-lerh eur mor glaz alaouret dindan an heol, war-lerh ar frankiz kentoh. Hual ebed ken warnañ, pegen c'hweg e vefe beva neuze.

Mikael, ma n'oa ket euz gouenn tud ar memez broiou, a gave ive striz ha moan al leh ma ranke chom. Troet da lenn leoriou enno istoriou avañturuz ha sebezuz, e leze e spered da nijal aliez war diouaskell ar faltazi. Gand eun tammig chañs, piou oar, e vefe gouest da vond war roudou tud brudet o-doa galoupet broiou disheñvel, dizoloet a beb seurt traou burzuduz.

Huñvre Karlos a oa ive hini Mikael. An eil oh isa egile, ne welent ket petra virfe outo da gas o menoz da benn. En em weled a rejont aliez. En eur

lakaad a-unan o nêrz, o skiant, o ijin, o ampartiz, oant gouest da zond a-benn euz o zaol.

A-raog en em guitaad evid ehan-skol goueliou Pask, o-doa reñket peb tra. Peb kudennoù a oa studiet piz, rag n'edo ket o zoñj chom a-dreuz.

Er gêr peb hini euz e du a bourchasas ar pezh oa red. An dervez da zistrei d'ar skol a deuas hag evel o henvreudeur, Karlos ha Mikael, giz kustum, a en em lakaas en hent...

Karlos a ziskennas euz treñ Kemper, Mikael euz hini Montroulez. War kêr gar Landerne edont, o-daou, war-dro peder eur, eur mouse'hoarz goapaüz war o muzellou, pa zellent a-gorn ouz o mignoned preset da zistrei d'ar skol. Mad ez ee peb tra. Arhant o-doa, rag en o godellou edo ar gont roet dezo gand o zud evid peñ an tri miz skol tremenet. Boued d'ober meur a zervez a oa ive en o malizennou : krampouez, kouignou, amann, peb lipouserez a vez roet gand eur vamm d'he mab o vond da veza kroufet e-pad tri miz en eur skol.

En eun ostaleri, azezet dirag beb a vanne gwin gweñ, e lakjont da vad urz e kement tra. O mouez avad a jome izel gand aon na vefent gwerzet. Daou laer, war-nez ober eun taol lakepoterez bennag, n'o-defe ket kemeret muioh a evez. Taoliou lagad a-gorn a daolent beb an amzer, pa zeue diabarz an ti unan pe unan. Ar plah yaouank a oa bet o servicha anezo, a zelle outo, eun tammig re aliez, a gav dezo. Sacha ! rejont buan o skasou ganto. Eun eur e hedjont en ti-gar, azezet war eur bank.

Dioustu ma tigor paotr ar bilheji e gaoued, emaint dirazañ. Eun tammig enkrez a zo e Karlos an hardisa anezo, pa houlenn daou vilhed evid Marseilh, mond nemed kêr. Eur wall stokad a bak o yalh war an taol. O halon o lammad en o hreiz, ruz glaou int o-daou pa zistroont da gemeroud o flas endro. Prim goude, o malizennou ganto en o dorn, e treuzont an nor vraz evid mond war ar hê.

Dizoursi ha dineh int bremañ. Greet oa ganto ar hammed kenta, ar gwasa. Ema digor dirazo dor gaer ar frankiz, ha diwar-nij, koulz lavared, e savont er vagon.

Eur zutadenn, daou pe dri boufad moged a deuas euz siminal ar marh du hag an treñ a lohas.

O fri pladet ouz gwer ar prenecher, e tispourbello o daoulagad dirag kement tra a welint. Bro-Hall, euz an eil penn d'egile, a vo red dezo treuzi a-raog en em gaoud e penn o beaj. Diou nozvez penn-da-benn e chomint war railhou, luskellet en o bagon. Gortoz a rankint e gariou 'zo, cheñch treñ a-wechou. Da goll n'ez aint ket rag ez eus deuet hardisegez dezo, hag o daoulagad hag o zeod n'emaint ket ganto ive en o godell. Keid ha ma pad ar boued ganto ne jomont ket d'ober kov moan, ha goude-ze, gand o arhant, e kavont peadra da lemma o dent.

Setu erfin Marseilh, porz-mor brudet kreisteiz Bro-Hall. Ahano e vo ez kemeroud lañs ha paka an Afrik.

Diskenn a rejont euz an treñ, dizoursi, eüruz. Goude beza lakêt eun draig bennag dindan o harvanoù, e kemerjont hent ar porz-mor.

Sebezet n'et e chomjont dirag an engröez tud a oe red dezo treuzi. Degouezet er porz, int mantret muioh c'hoaz gand ar safar hag ar jolori a zav e beb tu. Biskoaz n'o-doa gwelet na klevet kemend-all. Dond ha mond ar bigi war an dour, sutadennou skiltruz o sevel diouto, trouz pounner an houarnaj o koeza a-flagaj war ar hê ; o genou a jome digor braz ganto, o daoulagad a zispourbelle, o diskouarn a vouldinelle e-pad ma teuent ha ma 'z eent dirag ar porz. Eun heol bero a bare ouspenn a-bik war o hlipenn. Selloud a reent avad ouz ar batimañchou braz a oa aze dirazo, moged o sevel euz o siminaliou, prest da vond en hent. Mar gellfent sevel war bourz unan anezo ! Hag o spered a nije d'o heul. En tu all d'ar mor glaz, o lintra dindan an heol, Bro-Afrik o gede. Dizale e welfent heh aochou oh en em ziskouez en dremmwel... Evid c'hoaz ne gredent ket tostaad re ouz ar hê. Gwelloh oa studia piz peb tra ha selled mad a-raog, evid gelloud dond a-benn euz o zaol ; ijin ha skiant a zo atao gwelloh eged nêrz. Ankounac'haet ganto o naon hag o zehed e chomont da droidellad

en dro d'ar porz, war hed kaoud ar chañs da zizelei ar pezh a glaskont : an tu da lakaad o zreiz war eur vatimant a gasfe anezo du-hont en tu all d'ar mor.

An abardaez a deuas heb goñd dezo hag e teuent hag ez eent atao a-hed ar hê. Red oa klask lojeiz evid an noz.

« Noz vad, aotrouien, ezomm ho-peus lojeiz ? »

— Diou gambr, mar plij.

— Ho-pe ar vadelez da skriva hoh anioù, ho chomleh war ar haier-mañ ? Ho paperiou a zo ganeoh ?

— !!! »

Ober a rejont eur zell a-gorn an eil ouz egile.

« Gwaz a ze evidoh, paotred yaouank ! Eun dra red eo. Ouz an archerien or-bezo trabas a-hend-all !... Koulskoude avad, evid eun nozvez hebken ! Baptist, roit d'an aotrouien-mañ ar hamprou 13 ha 14 ! »

Paotr an ostaleri a zivinas dioustu ouz piou e-noa afer a gendalhas :

« C'hwiz zo o klask labour, me barife. Marteze ho-peus soñj lammed en eur vag bennag ? »

— Heu !... Ya !

— Mad, paotred, a zo distiñget ! War a welan ez oh gwazed dispont. Gouzoud a reoh; moarvad, n'eo ket êz kaoud labour en deiz a hirio. Dibabet war ar bern e vezer ha da zivall a zo da jom kazeg. Gwir eo, ho-peus êr vad hotaou hag al labour ne ra ket aon deoh. Kredabl braz ho-peus paperiou hag asant ho tud.

— Nann !... Eo, eo, da lavared eo, n'on-eus ket c'hoaz, med...

Heb chom pelloh da gaozeal e savont, eun tammig losteg, war-zu o hampreier.

Petra ober eno, nemed soñjal ? O soñjou n'o-doa ket ken na liou an oabl glaz na liou ar roz. C'hwita war o zaol, ken tost d'ar porz, eun druez oa !

On daou ganfart a dremenas eun nozvez dreud, trei ha dizrei a rejont en o gwele, berad kousked ebed n'helljont ober.

An disterra trouz ! e save aon enno. Pebez nozvez hir hag inouiz. Enkreiz a zavas enno. On daou babor a grene, o soñjal edo marteze an archerien o klask anezo. Debret ar braz euz o feadra ganto, ne ouient ket ouz peseurt sant trei. O bilheji a oa nijet evel gand an avel.

Abred diouz ar mintin edont o-daou asamblez er memez kambr. Fall kenañ ez ee an traou. Konta ha diskonta a rejont ar pezh a jome ganto : a-veh a-wall evid distrei-en-dro. Esoh eo dispign eged gounid ! Diwar o houst e teskjont ar wirionez-se.

Neuze e savas keuz ganto. Bremañ avad e welent pegen foll ha diskiant e oant bet.

Diskenn a rejont euz o hampreier, izel o 'fenn. War-zu pe du trei ? ne ouient ket hoaz.

« Chañs vad deoh, paotred ! » eme paotr an ostaleri, en eur lavared kenavo dezo.

On daou foeter-hent a jomas hoaz eun hanter-dervez da henaouegi en dro d'ar porz-mor, ar glaourenn o koueza euz o genou, en eur zelled ouz ar bigi o vraniskellad war an dour. Bremañ 'vad ne dostaent ket re ouz ar hê, rag aon o-doa ouz ar vallouterien hag an archerien a welent dre aze. N'edont ket e chal da lezel krabanou ar re-mañ da goueza warno.

« Ma 'z afem da glask labour », eme Karlos, « marteze e kavfem fred en tu bennag. »

— Heb paperiou, kredabl braz ! Suta ! a hellom. »

Nebet maro e choment atao. Kaer o-doa soñjal ha furchal, ne welent ket war peseurt tu trei. Mikael erfin ne welc nemed eun diskoulm d'o avañtura-denn : distrei d'o bro. Karlos avad a zalhe penn hag a hine kemeroud hent an distro. Tabut a zavas etrezo. Eur haer ha petra ken, setu petra oa Mikael evid Karlos. Dond war adreñv, morse ! Fachet an eil ouz egile, e teuent hag ez eent atao a-hed ar hê.

N'oant ket evid padoud e-giz-se. War-dro teir eur goude merenn edont er

gar o bilheji ganto en o daouarn izel o 'fenn, rannet o halon. Sevel a rejont en treiñ, hag evel daou zen kondaonet d'ar maro, eh en em lezjont da goueza war ar bankeier, ger ebed kenetrezo.

An distro a vo inouiz ha kaled. E Lyon e rankont dale diou eur. Naon o-deus, kleuz eo o stomok. Ar glaourenn a deu en o genou pa zoñjont e rata ar skol. Allaz ! tano eo ar pezh a jom ganto en o godellou. Eur beajour, gwall zammet gand e valizennou a houlenn diganto e zikour. Eun tamm gwerz-butun a bakont, med n'eo ket butun avad a gemeront : eun dorz vara gand eur zilzigenn euz Lyon. Eur banne dour d'o has d'an traon hag int barreg adarre, on daou ganfart, evid eur pennad mad.

En Naoned adarre e rankont chom a-zav. Chom a reont er gar da hedat. Skuiz maro int, o daoulagad a zo bihan. Gand o dilhad rodellat en dro dezo, eo eun druez o gweled.

Sevel a rejont en eur vagon ha prest goude oa on daou baotr kousket mort...

Pa jomas an treiñ a-zav, oa deiz mad hag an heol a oa uhel. Kreisteiz a zonas. Sebezet nê int pa glevjont paotr ar gar m'edont enni o youhal a bouez penn : « Ar Groazig ! Red eo d'an oll diskenn ! »

— Ar Groazig ! eme Karlos en eur ober eul lamm en e zav, dihunet nê war an taol. N'eo ket e Brest emañ !

Chom a rejont, evel daou henaoueg, da zelled an eil ouz egile, o genou ganto digor war greisteiz hanter. Netra da ober, nemed gortoz. Karlos ha Mikael a ziskennas neuze betek kêr. Ar hleier o seni e tour eun iliz a zigasas da zoñj dezo e oa ar zul anezi. E-leh chom da henaouegi war ar ru ez eont en eun iliz. Overn ebed n'o-deus bet. Gousperou avad a heuilhint. En eur zelaou ar han hag an ograou e teuas da zoñj dezo euz ar gêr, euz ar skol, euz meur a dra all hoaz ha dalc'ho c'hwero a gouezas goustadig euz o daoulagad.

Azêzet an eil e-kichen egile, fur evel daou êl, e lezent o spered da reded. Darbaret e oant gand an digemer a oa ouz o gortoz. Petra vefe greet outo ? Fest ar vaz marteze ! Kredabl braz e vefe treiñ ar zoubenn. Ouspenn e vefe red gouzañv mouse'hoarz goapañz o mignoned.

Teñval o 'fenn, skuiz-mar, eh en em gavjont e Brest erfin, nehet c'hoaz war be du trei. Hini ebed anezo n'oa e chal da zistrei d'ar skol. Karlos a gemeras hent ar gêr, Mikael a jomas e Brest, a ziskennas betek ar porz a gommiers da glask labour evid gounid eur gwenneg bennag, rag kraz oa bremañ. Kaoud a reas fred, med diouz ar pardaez, ar paour kêz paotr a oa ken skuiz, ken brevet e izili outañ, ma helle a-veh chom war e dreid. Seurt labouriou pounner, diskarga batimañhou, a oa dreist e nerz. Re yaouank oa c'hoaz evid beza doker.

Echu gantañ e zervez, gand an arhant e-nevoa bet evid e labour, e hellas kaoud eun draig bennag da garga e gov. Eun afer all avad a jome c'hoaz da zirouestla : al lojeiz evid an noz. Ar guhennig bilheji a jome gantañ goude e goan a oa berr evid feurmi eur gampr en eun hotel. Penaoz ober ? Mond da gousked dindan eur pont bennag, klask goudor e diabarz eur blockhaus alamant. Riskluz e kave an dra-ze, rag oan e-noa kouezfe ive e-touez lakepoded ha kanfarted ha n'oa ket brao kaoud afer outo.

Edo o ruza e vontou e ru Jean-Jaurès, nehet maro, pa zeuas da zoñj dezañ euz eun ti, dalhet gand leanezed, hag a rofe digor dezañ marteze. En ti-ze oa bet o tebri, pa oa bet e Brest o tremen arnoden ar C.A.P. er bloavezh tremenet.

Mond a reas eta da houlenn aluzenn eur gwele eno. Pa oe gwelet e peseurt stuziou edo hag euz a beleh e oa, e oe digemeret dioustu gand ar Zuperiorez. Konta a reas e istor penn da benn. Keuz a ziskouezas kaoud war-lerh an tam-mig sarmon a bakas digand al leanez. Houmañ a zigasas dezañ eun tammig frealzidigez pa ginnigas dezañ reñka peb tra etre ar skol hag eñ. Diouz ar mintin, en deiz war-lerh, goude eur honsk mad, unan eta euz an deñved diantket a zistroas d'e skol, izel e benn ha dizonet evid atao euz ar c'hoant mond da reded bro.

EUN DRO-FURCHAL E SANT-TEGONNEG

...hag e fichennou ya Istor al lennegezh.

War va hent on en em gavet gand : Y.-M. Le Roux, Guillaume Rioual, Louis Tanguy, I.-V. Perrot, Fanch Caurel, Jakez Kerrien a gavis bodet e Roh-toull.

Yves-Marie Le Roux, 1760-1837.

Mab da Yves ha da Françoise Marie Podeur o chom er bourg Sant Tegonneg, Yves Marie a oe ganet d'an 29 a viz Kerzu 1760 ha badezet d'an 30 gand person Guiclan.

Da baeron oa bet « vénérable discret missire Yves Marie Podeur, person Communa » par permission de l'ordinaire » a lavar diellou an ti-kêr. Jeanne Pouliquen a oe maeronez. Ar roll a zo sinet gand ar paeron, gand Le Gouat, person Plouneour Menez, G. L'abbat, person S. Tegonneg, hag Aultrait, person Guiclan.

An aotrou J. M. Roux a zo bet person Communa, Gwielan, Gwitevede, ha rener Sant Jozef, « ti ar veleien goz » e Kastell.

Epad amzer an Dispah braz e kavas repu e bro Spagn. Kaner, ha kaner brudet, oa er vro-ze.

Brudet eo bet ive en e vro evid beza savet ar ganaouenn *Ar Spillen*. E pevare leor kanaouennou dornskrivet gand Leđan hag a zo e leordi ti-kêr Montroulez e diwez ar ganaouenn eo douget (pp. 235-243) e ano ha person Plougourvest.

« Feiz ha Breiz » 1865 a lavar kement-mañ, p. 263 : « Ar re a lavar eo ar brezonneg eul langach pounner n'ho deuz ket lennet, klaoustre ! *Barzaz-Breiz*, great gand an Aotrou Keryarker. Ho fedi a ran da len ar ganaouen gret var beguic eur spillen gand an Aotrou Rous, ha da lavaret d'in hag eun dra ben-nag a bounner a helfe del'her var beguic eur spillen. »

Louis Tanguy, beleg 1762-1847, a zo e año war roll mortuajou 1847, d'an 1 a viz Gouere. Ar roll a lavar ez eo tremenet e Lividic. Eno edo hag emañ c'hoaz presbital Sant Tegonneg. Louis Tanguy, bet ganet e Taole d'an 19 a viz Du 1762, beleget e 1805, a oa bet person Sant Martin Montroulez. Person Sant Tegonneg e oa abaoe 1819 ha chaloni. Mervel a reas d'an 30 a viz Even. E varo a zo bet diskleriet gand Fanch, e vreur, 80 vloaz, kouer bet, ha Rene Tanguy, beleg, o daou o chom e Lividic.

— Louis Tanguy a aozas : *Ar quir gristen* cunduet hac enchet en oll cir-constançou eus e vuez in 18. XIV. 273 p. (gand imachou). Mouladuriou al leor : 1818, 1822, 1831, 1848, 1847, 1869. Kreski a reas al leor beteg kaoud 328 p.

— Mouladuriou all a zo bet, a gredan, rag, eur skwerenn am eus gwelet gand deiziadur 1891. Ar pevar mouladur kenta merket amañ euz a di Guilmer, Montroulez ; ar re all euz a di Desmoulins, Landerne.

— Adaozet eo bet gand an Aotr. Tanguy *Preparacionou d'ar maro* gand an Aotr. Charles Bris (Guilmer, Montroulez, 1840, 88 p.).

« Dresset a scrifet a nevez » a lavar Tanguy en e « Observacion » e penn al leor. An astenn laket gantañ da levr an Aotr. Bris a zo, emezañ « tennet eus a eul levr gallec approuvet mad. »

Eun dornskrid : « Sarmoniou evit ar bloavezh 1828 » a zo e diellou Kemper (dastumad Taldir).

Guillaume Rioual, beleg (1793-1843).

Hervez leor « Sant Jozef (p. 332), an aotrou Kerne, e Plouneour-Menez e oe ganet Guillaume Rioual. E Sant Tegonneg e lavare an Tad Bourdoulous e *Feiz ha Breiz* (1905, pp. 40-143). Gand hemañ emañ ar wirionez. Diellou Sant Tegonneg a zoug ez eo bet ganet d'an 18 Kerzu 1793 « second de la République française, une et indivisible ». Guillaume Rioual, mab da Ollivier, labourer douar e Coulart ha da Marie-Renée Floch.

Meneg a zo anezañ er Bulletin diocésain de Quimper 1931, p. 44. E año a zo e *Kanaouennou Santel* an aotrou Henry gand 4 gantig savet gantañ.

— G. Rioual a zo bet eur hantiker. E 1833 e lakeas moula : Canticou evit usach ar Retrejou hac ar Missionou, composit gant eur Belec euz a Escopti Quimper, G. R. P. S. E Quimperle e ty Lion. Ar beder lizerenn a dalv : Guillaume Rioual person Scaer.

Chapel Coadry e parrez Scaer a zo brudet he fardon ; gouestlet eo d'an Itron Varia ha d'an Aotrou Krist. Ar basion a zo bet diskleriet gand an aotr. Rioual en e gantig : Gouelit, va daoulagad.

Savet e neus ivez : Savomp or sperejou dreist an oll draou crouet, a gaver e divez leor an aotr. Roudaut. An Ene Christen e Bali en Ee, gand e ano : an A. Rioual, person Scaer.

Eul leorig all a anavezan : Instruction var hend ar Groas gant ar praticou eus ar memez devotion gand G. R. P. S. E Quimperle. Imprimerie Lion, mab 1835.

An aotr. Rioual a zo marvet e Sant Jozef e Kastell d'an 17 a viz Eost 1843.

Deg vloaz goudeze e oe moulet adarre e leor kantikou « gand an Aotrou Rivoal ». E Quimper e ty Lion (48 p.).

I.-V. Perrot. Petra ? a lavaro lod. Ober meneg euz an aotr. Perrot, tad ar Bleun-Brug, en eun taol-lagad war istor ar brezoneg e Sant Tegonneg ? Emichans ablamour hebken m'ema Bleun-Brug Leon da veza lidet eno d'an 20 a viz Gouere ? Nann ablamour m'eo bet an aotr. Perrot kure Sant Tegonneg euz a viz Meurz 1914 beteg ma oe sourdardet ha bloaz goude ar brezel.

En diweza Bleun-Brug e skriven e oa plijadur ar furchêrêz gouzoud piou, peur, perag, penaoz e oe skrivet an dra-mañ-dra. Sellit ouz geriou kizellet war vonumant ar re varo. Re binvidig eo brezoneg ar geriou ; ha « *Banniel aour ar frankiz* » a dalv eur sinatur. Ma c'hoanteit gouzoud hirroh diwarbenn talvoudegez ar gerou diweza-mañ lennit « *Hed a hed steriou Bro-C'hall* » war « Feiz ha Breiz », niverenn genta deut er mêz euz ar wask goude ar brezel braz (Gouere 1919).

An aotrou Poisson a lavar en e leor war vuhez I.-V. Perrot n'ez ee ket an traou re vad etre e berson hag eñ.

EUN DRO E ROH-TOULL

Kenta tro e livirin deoh petra zo c'hoarvezet ganen er Roh-toull. Da hortoz lennit leor dudius Jakez Kerrien, bet embannet gand *Emgleo Breiz* hag a gaver da brena e B. P. 17 Brest, 385 lur, kwit a vizou

Ar Roh-toull a zo e parrez Sant Tegonneg
ha Jakez Kerrien a zo Sant Tegonnegad.

François Caurel (Evnig Arvor) 1874-1954.

Bet ganet e Plounevez-Quintin d'ar 27 a viz C'hwevrer 1874. Skolaer e oe e Plancoët, Sant Nikolas ar Pelem. En em gaoud a reas e Sant Tegonneg d'ar 14 a viz Eost 1921. Tremena a reas oh ober skol gand ar Marianisted eur penad brao a amzer.

Kenlabourer eo bet da *Ar Vro, Kroaz ar Vretoned, Breiz, Arvorig, Feiz ha Breiz*. Kelenner kristen ha Breizad oa Evnig Arvor. Peziou-c'hoari evid bugale ar skolioù e neus savet ousspenn *Paner burzudus ar mevel Fanch*. N'oun ket deut abenn d'o haoud, na kennebeud da gaoud eul labour grêt gantañ diwarbenn I.-V. Wir Zikour. E gantig da Zant Melar a zo bet kempennet gand an aotr Roudaut, marvet kure e Laz.

Kavet em eus e Sant Tegonneg eur ganaouenn : Va bro Sant Tegonnec. Morlaix, Imprimerie Hamon, rue de Brest. E miz Gouere 1925. E. A. da lavared eo Evnig Arvor.

Deut da veza klañv ha dall ez eas da repu e kichen Paris. Eno e varvas. (Sellit ouz Istor lennegezh Abeozen, n° 207).

E Gwiklan

« Bleun-Brug » diweza a brome'e lavared d'e lennerien pehini oa hag e pelêh edo ar pennad hirra brezoneg kizellet. E Gwiklan, tost da Zant Tegonneg eta, ema, war monumant ar re maro er vrezel ha daoust ma 'z eo kizellet ive warnañ : Aux enfants de Guiclan morts pour la France.

Setu : *O ! Blêveier dispar mil nao c'hant pevarzek.
E-giz ma sav eun derven gaër dreist eur vezeg,
C'houi skedo da viken dreist an oll zoudardet,
Rak ar re vrudeta raer anezo ar gaoz ;
Re Sézar, Annibal ha Napoleon-goz
A gwezse d'an daoulin dirak ho kardedet
Evit frankiz, enor hag eürusted ho pro.
Ho peuz goude mil boan gouzanvet ar maro.
Hag e kouskit brema didrouz en douar ien.
Hogen ar feiz a lak hor c'halon da dridal
O fiskevez d'eomp en Nenn o lintra war ho tal
Ar gurunen a ro Doue d'e verzerien.*

T. AR GARREK.

Amaoud a ran brezonegerien chomet bout dirag ar ger : Blêveier — Ma vez roet digemer d'ar ger er geriadurioù brezoneg e ve mad rei dezañ talvoudegez ar ger galleg el Larousse : *Poilu*, homme fort ou brave. Soldat de la Grande Guerre.

Toussaint (Hollzen) Ar Garrek a oa barner a beoh e Taole, tost da Wiklan. Skrivagner brudet eo bet en e amzer.

(G. S. Goude skriya. Deut eo da zonzj din ez eus en enez Kallot eun enskrivadur hirroh eged hemañ. N'eo ket kizellet, avad.)

Er vered, tost d'ar monumant, eur bez a zoug :

« Aman e skeud ar Groas eo beziet korf Catherine Madec, pried da François Cardinal maro e Kérgoat 13 Even 1884 (52 bloas). Savet he deus dec krouadur, laket dougeans Doue en ho c'halon. Doue he digollo. »

28 vloaz goude e bried d'ar 7 a viz Kerzu (1912) goude eur vuez leun a skouer vad evit an holl François Cardinal oaget a 84 vloaz ha pevar miz a rentas e peoc'h e ene da Zoue. »

Gand piau, a gav deoh, eo bet skrivet se ?

Ma ouezit istor ar Bleun-Brug hag hini Feiz ha Breiz e kavoh ano an aotrou Cardinal, person Sant Noug, person kenta an aotr. Perrot ha rener ar gelaouenn en e raog.

E iliz Gwiklan, war daolenn : Evit Doue hag ar Vro. 1914-1918. « Bugale Guiclan maro evit ar vro. O Doue, skuillit var-n-ho ho madelez. »

Ma vije bet e peb parrez, e peb bered a Vreiz brezoneg evel ma 'z eus e lehehou-zo ne vije ket bet or yez er stad truezuz m'ema hi dre bened he bugale.

L. Lok.



pedenn diouz an noz

« Aotrou, chomit en ti, hed an noz, ni ho ped.
Kasit pell diouzom ardou an droug-spered.
Dindan askell on 'el-mad ra gouskim oll e peoh,
Bihan ha braz ni houlenn ho pennoz diganeoh. »

Kontadenn Bizai

gand mab an dig

Pennad kenta : N'eo ket e mank em-oa klevet kaoz diwar e benn.

Er parrezioù, ez eus tud hag a deu, abalamour d'o 'furnez, d'o skiant, a-wechou d'o deskadurez, ha dreist-oll d'o halon vad, de veza brudet ha deuet mad gand an oll.

Kerkent ha ma tigouez eun diëzant bennag en ti, e soñjer enno. A-hend-all, pa roull mad ar rojou... nebeud avad !

Al loan a zo klañv, ar penn-moh ne ra nemed badinella... an Hervé, gal !... deom da glask an Hervé !...

An Hervé — kousk pe zigousk — a deu kerkent. N'eo ket savet da binvidig ! A ! Ma vije bet dezañ ar moh, ar zaout, hag ar hezeg e-neus pareet, ne lavaran ket !... pe ma vije bet pèet evel an aotrouien... a werz war ar marhad louzeier a heb liou, a heb ment, da lakaad diouz an daou benn d'ar paour kêz chatal ! Gand an arhant lakeet en o hov, hag e godell an aotrouien, e vije bet pinvidig an Hervé !

Fañch, eñ, a zo anavezet evid eun dra all... Oujenner eo, hag unan dreist. Pa blij eur paotr yaouank d'eur plah yaouank ha pa blij ive d'ar gerent, e teu d'e gaoud d'ar zul, goude ar gousperou !... Ha d'an deiz war-lerh... ne gemer ket eur vaz valan, nag eul lerou ruz... evel gwechall... nann ! Evel dre guz eo e tagont ar goulou-deiz !

— A ! 'ta, Mari ! Dare ar rouzig ?

— Gwall abred o troia, Fañch !

Hag e troidell gand e gaozioù... hag e c'hoarz... hag e prezeg... gwelloc'h eged ar person... hag e taol... e higenn, ken goustadig ha tra !

Hop ! ar pesk war al leton ! Ral eo ne deufe ket a-benn euz e gefridi, hag an tiegeziou savet gantañ o-deus oll brud da veza enno heol o para war beuri founnuz ha war vleuniou dudiuz !

Ped ha ped all a labour evel-se evid mad an oll !



Ped gwech em-oa klevet : « Bizai an dra-mañ, Bizai an dra-hont ! » « Nehet oh ? It da weled Bizai. Hennez a oar leun a draou. »

Hag e teue din da zoñj euz istor Per ar Vilin, eun istor goz ! Hennez avad a oa finesaou en e gorr !

Pe veze skotet an amann, ez eed d'e weled... hag e parea an amann !

Pa ne veze ket ar wreg war he zu, dao ! da weled Per... hag hi kerkent yah pesk !

Ne oa na foutre na brall da enebi outañ !

Mad ! Bizai a oa eun tammig heñvel evid tud Sant-Pabu.

Eñ a ouie kerentiaj an oll. Eñ a ouie pegement a arhant a oa er yalhou kuzeta. Eñ a ouie gand eur ger lakaad ar peoh etre tud hag a venne sailha an eil war egile abalamour d'eur gwir hent... pe d'eun targaz laer. Ya ! Gand eur ger hebken e teue a-benn euz e daol !

Eun deiz em-oe ar blijadur d'e weled : da zul ar Hazimodo, edo lein kuzulierien an iliz er presbital.

Ez deoh gouzoud, Bizai a oa kuzulier an iliz. Tud evel-se ! Salv e vije muioh anezo da ren ar parrezioù !

Kabah oa eet : e tile tostaad ouz e bevar-ugent, Mouse'hoarzin a ree kouskoude atao dalhmad, ha pa goazeen gantañ n'oan ket evid gouzoud petra lavare ar mouse'hoarz-se.

Bez' ez eus tud hag o-deus eur mouse'hoarz diot, eur mouse'hoarz krami-
poez, ha na ziskouez netra nemed eur spered berr.

Bez' ez eus re all hag o-deus eur mouse'hoarz goapaüz evel pa gemerfent
ar re a zo dirazo evid genaouerien.

Ne gomzan ket euz mouse'hoarz ar merhed, p'o-devez c'hoant touella unan
bennag. Nann, euz mouse'hoarz ar wazed hebken.

Mouse'hoarz Bizaï a oa mouse'hoarz eun den fur, med eun den hag a ouie
e oa fur. Prezeg a ree d'ar re a veze war e dro beza fur o-unan, en eur glask
koulskoude e peb tra hag e peb leh an tu kaerra ha laouenna.

E-pad lein ne lavaras ket kalz a dra. Gand ar re yaouankoh, egetañ e oa
a-walh a jogell hag a vrabañserez, douetuz braz. Eur ger beb an amzer heb-
ken, med eur ger hag a deue evel eur bann-heol dre 'faout eur prenest serr,
hag a daole e sklêrijenn birvidig e sal ar presbital.

Ya ! Bizaï, gand e vleoe gwenn-kann, e zaoulagad lemm hag e vouse'hoarz
leun a 'furnez, ne vije ket bet eet fall dezañ en oll... dilhad alaouret eun eskob
hag e vaz a rener !

Eun den oa euz an dibab : êz oa da gompren e ve kement a fiziañs ennañ.

— Me yelo d'ho kweled, Bizaï, eun deiz am-bo amzer.

— An neb a gar a gav' atao amzer, emezañ en eur vralla e benn.

Ar hatar, ar gozni, ar boan izili, a deuas dizale da zamma ar paour kêz
Bizaï. E gein a blegas c'hoaz muioh. Re bounner e teuas da veza ar beh, hag
e rankas chom en e wele.

Eil pennad : Ar vuhez a zo kaer.

— A ! Deuet oh d'am gweled ! Plijadur a rit din. Dilastrit 'ta eun tammig
korn an daol. Jan n'he-deus ket bet amzer da zastum traou mern-vihan.

Hag e vrall e benn ar paour kêz koz, gand eur mouse'hoarz leun a vadelez.

— An dud bremañ, gweled a rit, aotrou Kure, a deu da veza trefuet.
Labour ! Labour ! Dihagni ! Gwechall e yeed war an dres.

O ! Gouzoud a ran ! E ranker beva gand an amzer... e teuo mekanikou
muioh mui er vro... Da esaad al labour ? Ha ma vije gwir ! Me a garfe fazia !
Med me a gav din e lakint an dud da vresa muioh mui. Seul vui... seul c'hoaz
a arhant... aourgouilh ive... Kleñved an aour a zo eur gwall gleñved. Kleñ-
ved ar bresa a zo unan gwasoh c'hoaz, a gav din.

An ivoulog ne ra peurliesia droug nemed dezañ e-unan, med ar breser a
vreso n'eus forz petra ha n'eus forz piou evid bresa muioh. Hag e gleñved
a zo taguz.

Krog eo zoken e diadrenñv meur a gure... Ya ! D'ar red tan an overenn...
D'ar red tan ar pedennou... Traou all a zo d'ober ! Peseurt traou all ? Ar
bedenn eo an dra dalvoudusa, em-eus desket gwechall... Ha war an dres eo
e ranker pedi !

Med n'oh ket deuet da weled Bizaï evid selaou prezegennoù, aotrou Kure !
Digorit 'ta an askomb. Er horn tro ema ar gwin. Ar gwer a zo en armel vihan.

La ! Eur banne ne ra ket a zroug ! Ha distagella a ra an teodou !

— Eur vro gaer eo Lambaol, aotrou Kure.

— Ya, Bizaï, med, gweled a rit, n'am-eus ket bet gwall a amzer d'he zañva !
Er skol emañ abaoe ma 'z eus ahanon !

— Va mab-bihan a zo ive war ar studi. Truez am-eus outañ ! Tud desket
a ranker kaoud a ouezan, evid ren ar re all. Med, goude ha ma teufent diwe-
zatoh da veza aotrouien, n'em-eus tamm avi bed outo. Al labous a nij el lech
ma kar n'e-neus ket avi ouz al labous er gaoued. Ha pebez kaoued war ar
marhad ! D'al labousig ! Hañ ! Ya ! Me zo prest da lakaad an dud desket war
reñk ar verzerien !

Va buhez din-me a zo bet ken kaer ! Pa oan bihan, aze e korn an oaled,
nag e oa greet din allazig ! Tad-koz va hemere war e varlenn, am lakee da
zañsal :

« Eu ! Eu ! Pikotin !

Da Landerne d'eva gwin !

Gwin, gwin, bara mad

Da Vizaig ha d'e dad !

Hag e vamm n'he-do tamm,

Nemed foetet gand skourr lann ! »

Va mam-goz, pa 'z ee d'ar marhad, a zigase din leun a vraoigou.

Va zad am lakee war gein ar hezeg, foug e enañ o weled e baotr o tond
da zen.

Ar hi, d'an disterra ger, a zente ouzin, ha me hel lakee da redez war-lerh
kizier an amezeien.

Dond a reas ar poent da vond d'ar skol ! C'hwel eur bemdez kraouiet :
n'eo ket re denn ! Ha goude-ze, dipadapa ! dreist ar haecou ! da c'hoari gand
an dour er prajou... da glask neiziu er gwaremmiou... ha dizale da zaoulam-
mad war gezeg digabestr dreist an tergin, e Korn-ar-Gazel !

Me a yeas abred da gurust, rag, ma oan direol, e karen pedi, hag en iliz,
peurvuia, e veze fur an ailion ! Ar person, ar hure, a ree din leun a gamam-
bre. Avalou ha per mad a zo er presbital, ha beb an amzer e veze roet din eur
guchenn da leunia va godellou ha va bruched.

« Hemañ, eme eun deiz ar hure, a zo lemm e lagad. D'ar skolaj e tlefe dit
mond, va 'faotr-me ! »

Ha nann, avad, emeve dioustu.

Pa vez bet lezet ar bouchig bihan er prad da ruilh e gerh dindan ar gwez
braz, ha da zevel e dalbenn en eur lammad dreist ar gouerien, e teu da veza
diêz da graouia ha da zerhel pennasket.

Me a oa gwasoh eged eun ebeul bihan, ha ma vijen bet kraouiet, e vijen
marvet, a gav din !

Mêziou Sant-Pabu a gane din, a vezve va halon ! Me a youhe e traonienn
Meznaot, a c'hoarze ken na dorten pa lakee an ekleo da dregerni gand va
mouez ar Hoad-Tailh, Ruzulan, an Aber, tergin Treglonou ha Landeda !

Ar mor, dreist-oll, a blije din. D'ar zul, goude ar gousperou, pa vezem bet
oh ober eun dro e park ar Hannou, o selled ouz ar baotred yaouank oh en
em hourin, me a yee gand ar vugale euz va oad da hoari gand ar bagou e
Porz ar Vilin.

Nag a jolori a veze eno ! Ken na veze torret a-wechou ar roeñvou ! Neuze
avad e save tabut etre ar vizinerien d'al lun vintin :

« Mousetaj doanet ! Da arzouilh dit te a zo bet adarre e va bag... M'her
pakan, e kousto ker d'e ler ! Me a astenno dezañ e ziskouarn ! »

« O ! Da re dit te n'int tamm ebed gweloh ! Ro peoh ! Emberr me 'bêo
dit eur banne », a lavare dezo va zad, eun den hag a gare ar peoh, ha n'e-neus
bet morse a 'facheuri gand den ebed.

Ha beb sul e veze heñvel ! Ha beb lun ive !

Me a zave da waz. Echu oa evidon ar skol. Me a lakaas va levriou en eur
horn er halatrez ! Aze emaint douetuz atao !

Ha stag d'a labour ! Nag e karen va 'farkeier ha va jatal ! Nag a 'foug
ennon o charread !... o kregi evid ar wech kenta en arad !

Kared a reen ive va zi ! Nag oa c'hwel dond ennañ er goañv, goude beza
bet o tenna panez er mêzeier, dindan ar glao, an avel hag ar hazard ! An noz
a deue... Kerkent ha ma lakeen va zreid war an treujou, e teue davedon
c'hwel-vad soubenn ar hig, pe zoubenn ar freskad, ha c'hwel al lêz livriz edo
va mamm o tienna.

« Ha neuze, va 'faotrig me, n'out ket re skuiz ? Arabad dit en em laza !
Deus 'ta da eva eur skudellad lêz livriz ! »

An eonenn a stage ouz va meuziou, ouz beg va fri, ouz ar blevennigou a
ziwane dindannañ.

« Ro teil dezo, ma savint gweloh ! » eme va mamm en eur c'hoarzin.

Aliez e veze en ti Soazig, eur vrunardenn euz a gichenn... deuet da glask eur zailh, pe eur bloue-neud, pe d'ober eur varvaillhadenn gand va mamm... pe da gaoud eur mousc'hoarz digand ar paotrig ha n'oa ket mez e weled ! Goude em-beze muioh a nerz-kalon da ober ar zervij !

En eur gana eo e trailhien boued rabez, panez ha lann, e rinsen al laoueroù, hag e servijen evel rouaned va hezeg ! Me a gomze outo gand karantez, hag en o daoulagad e lennen o harantez dezo ive evid o mestr yaouank !

Goude dervezioù evel-se e tiskenne ar hig ha farz, m'henn asur deoh !

Bremañ e tesker d'ar re yaouank ober kuzun a hiz nevez. Pa 'z eer d'ar frikojou e tigas war an daol a beb seurt traoù. Evidon me, gwella tra a zo er bed, eur zahad farz, en e gichenn, eur pladad kig moh ! dreist-oll pa veze aozet ar pred gand va mamm-goz ! Re gal ! Glaourenni a ran c'hoaz o soñjal er farz gwenn... er farz du... er hig... el lipig... a deue bemdez war an daol, aze, d'an ampoent.

An daol-ze ! Nag a blijadur, nag a hoarz a zo bet war he zro ! An dominoù a strake warni e-pad beilhadenou ar goañ ! Nag a gan ! Nag a 'freuz !

Ya ! Paotr yaouank oan bremañ. Me a gane muioh c'hoaz er parkeier, war ar mor, o tastum bizin d'ar reverdiou e va bag. E va gwele-kloz zoken e kanen ! Ar vuhez a dride ennon !

E pardon Lanbaol oan bet oh en em ganna. Douaret em-oa daou pe dri ganfart brudet evid o nerz. Siwaz ! eur vandenn all a zailhas warnon, hag e oan bet lakeet er prizon en eur hraou moh ! Med da bardon Sant-Pabu ni a dapas krog enno oll hag o lakaas da zidana er houeren e Pôrz ar Vilin !

Paotr gouest oan, sonn war va hilhorou, ha sahadou gwiniz war va hein, e teuen en eur zañsal war-du ar grignolioù. A laz-korv e labourer, hag an tiegez a ree avi d'an oll !

Merhed yaouank Sant-Pabu a glaske tapa krog er pennher gand o mousc'hoarz bet atao ken touelluz. N'oa ket eur merhetaer. An hini a deue da weled... va mamm o tienna al lêz abaoe pell amzer, a blije din muioh mui. D'ober petra mond da bell bro da glask bleunioù kaer pa 'z eus o skedi harp ennoh perlez ken dudiuz ?

Eur pardaez oa... e miz Mae... soñj am eus ! Eur barr a oa bet, da laza ar boultrenn... ar mor a voude o tioha an arne. Ni a oa on-daou... unan a beb tu d'an drav, o c'hoari ganti.

« Gouirikad a ra », eme Zoazig, « poent eo eolia ! ».

« Ya » emeve, « poent a-walh ! Med leun a draou a zo da eolia, amañ, Soazig... An doenn war an ti... ar hreier... al lab... a zo poent ober eun dresa dezo ! An diabarz... e-unan... ne rafe ket a zroug dezañ eur hennenna ! »

Ha mui grig ! Ar moullhi a stagas da zutal e foenneier ar Vilar. E-touez delioù nevez o luia gand bannou ruz ar pardaez, eun dourhanig a zerlinke he 'fater. War bost an drav, setu deuet da c'hoari brañsigellad eur pistrag, hag en e gichenn, kerkent, oh ober kuik, eur penn-duig euz ar haerra.

« Soazig ! Soazig ! Me a zavfe amañ eun neiz nevez ma teufe ganin da vev ennañ... eur penn-duig ! »

Diou vreh tomm a lammas kerkent da starda din va chouk ! An drav a strakās, al laboused a nijas kuik.

En ode diou galon en em liamme oh ober kuik gand eur pok.

✱

Ma oa bet kaer va buhez beteg neuze, da houde e teuas da veza c'hoaz kaeroh. Va zi, va ziegez, va broig, me o haras bremañ gand diou galon.

Evel ar re all, on-eus bet o poanioù. Ar mor ne hell ket atao chom blod. Ar vuhez a zo eun emgann, ha me gav din, a-hend-all a teufe da veza inouiz. P'on-deveze bet an treh, an dervezioù trubuilhuz a deue da veza aliez ar skedusa, abalamour, douetuz, ar halonou en em unane neuze ken birvidig ha d'ar pardaez a wechall, e-kichenn drav al leur.

Pa deen d'ar frikojou ha d'ar foarioù, me a jome eun tammig da droidelad. P'am-bevez evet eur bannig e teuan da veza eur rimadeller ha ne ehanan ket gand va 'farabolennoù.

Soazig a deue d'ar gêr e va raog, da gempen an ti hag an arrebeuri.

E va raog eo reet ive d'ar Baradoz da gempenn on tiig e rouantelez Doue.

Bemdez e tle dezi seha an daol hag an askomjou, evel gwechall en eur hrozmolad :

« E pe leh eo jaret adarre, va lanfre ? N'eus fin ebet dezañ. »

Hag e sav he 'fenn, en eur vousec'hoarzin :

« Lamm 'ta afo dreist an drav evel gwechall... evid rei din eur pokig ! Deus 'ta buan, Bizaï, va 'fistrakig ! »

(Da genderhel.)



keleier

Devez a vignoniez Landi.

Eun dever a vignoniez a zo bet greet gand Bleun-Brug Leon, e Landi, d'an deiz kenta a viz Mae, evid strolladoù Leon Daoust ma ne ree ket a houel an dud diwar ar mêz, eun tri-ugent bennag a yaouankizou, a gemeras perz en delz-se, eur Landi, Montroulez, Plouédern, Brest, Plougerne, Lokronan, Kemper, Kastellin.

Diouz ar mintin, evid digeri, G. Pijon a lavaras peseurt labour kristen ema ar Bleun-Brug o hortoiz digand e yaouankizou : kelennadurez, karantez, levezeg...

Eur weladenn kenteliuz kenañ, a oe greet goude da ilizou Gwimilio ha Lambaol. Ao. Person Gwimilio, a ouezas displega brao ha sklêr, pinvidigeziou dispar e galvar, hag e iliz : teñzorioù a dremener dirazo heb o merzoud, re aliez.

Eur préd laouen a oe servichet goude e skol ar Frered, hag ar han-da vond en-dro, dindan renadur an Ao. Abjean.

Goude ar préd, an oll a gemeras hent Brezal, eul leh dudiuz etre Landi ha Landerne, el leh ma oe selaouet prezegenn an Ao. Duigou ken leun a gentelioù talvouduz evid ar re yaouank a vremañ : « Nann, paotred ha merhed, n'eo ket c'hwit emezañ eo a zo tud diwarlerh. Tud a-raog ne lavaran ket. Kendalhit ha lakit sao tro war dro deoh, en ho parrezioù da genta »...

Goude beza tañvet ar Baradoz a hjaister, m'eo Brezal, war lez al lennad dour, ha dismantrou iliz Pont-Krist, pep hini a zistroas da Landi evid eur verenn yihan, e skol ar Frered adarre. Amañ e oe lennet kentelioù an devez evid mad an oll, ha goude eun taol dañs ha biniou, e oe kemeret hent ar gêr.

Kenavo ar wech all. Kenavo Bleun-Brug St-Thegonneg.

Devez ar brezoneg.

Kuzul-Jeneral ar Finister e-neus votet 250.000 lur evid « Emgleo Breiz » pe devez ar brezoneg.

Ouspenn kant-tregont skol gristen, er Finister, o-deus kemeret perz, er gast, evid devez ar brezoneg. Nebeudig tra avad, a zo bet o kental, er « Côtes-du-Nord » hag er « Morbihan » daoust da halv on eskibien.

Moarvad, labour Sekretour meur, ar Bleun-Brug, ar Frer Vasant Seite, eo a zo penn kaoz ma 'z eus bet kement a skolioù o labourad, er Finister. Roet e-neus, a-benn bremañ, ouspenn 80 abadennad, er skolioù-se, abaoe penn kenta ar bloaz. Ouspenn, az gwelet e-neus, e-unan, a-raog devez ar brezoneg 103 skol ha roet dezo ar paperioù red. Eul lodenn vad euz ar skolioù-se o-doa greet o-unan ouz Emgleo-Breiz, ar goulenn da gestal. Doue ha Sent Breiz d'o faea evid o 'foan.

Beilhadeg kaniri Santel.

D'an 13 a viz Mae, Lazou-kana Sant-Korantin ha Sant-Vaze Kemper, o deus roet, e iliz-veur Kemper eur veilhadeg kaniri santel, dindan renerez *an aotrou'n Eskob Fave*.

Ar veilhadeg-se laket war-zao gand *Bleun-Brug Kerne*, a zo bet euz ar henta. Eur mil' bennag a dud a deuas da zelaou ar' ganerien hag an ograou dalhet gand *Gerard Pondaven*. Ar hantikou brezoneg kanet ha c'hoariet a oe prezantet er mikro gand an aotrou *Chalon Nedeleg*, sekretour an eskopti.

An eurvez tremenet en iliz-veur, en abardaez se, a oe eun dudi evid an oll. *Berren-tes ar vuez, ar maro, ar Baradoz, ar Werhez*, eo bet testenn ar veilhadeg santel. Dibradet gand ar han ha mouez an ograou, ar zelaouerien en em gavas o-unan, evel er Baradoz.

Meuleudi a zo dleet d'an aotrounez *Kerien* ha *Kalvez*, renerien an daou laz-kana ha d'an aotrou *Pondaven* evid an abadenn-se, ken kaer. Heti a reom o hleved c'hoaz meur a wech, koulz e Kemper hag el leh all.

Kanou santel e Montroulez.

D'an 20 a viz Mae, kanerien Bro-Leon, euz Landivizio, a roas eun abadennad kanou santel, goude koan, e iliz Sant-Vaze Montroulez.

Da 9 eur neméd kart, an iliz en em gave leun pa grogas an ograou da zen, dindan bizied ampart an Ao. Gerard Pondaven ograouer e iliz-veur Kemper.

E-pad al lodenn genta, ar ganerien a roas da gleved oberou sonerien vraz evel Haendel, Bach... e galleg, en italianeg hag e latin.

An eil lodenn a oe brezoneg penn-da-benn. Houmañ eo a blijas ar mui. Evel-se, lakaad heñver-ha-keñver, or muzik breizeg, gand muzik ar zonerien vrasa euz ar broiou all, a zo eun dra vad da zigeri sperejou or henvroiz.

Seiz kantig d'ar Werhez (Evid beva gand levenez), da Zant Joseph, da Zantez Anna (Intron Santez Anna), da Zant Yann (Embanner braz) ha da Nedeleg (Messi, deuit — Sklerijenn gaer — Kanom Nouel) a oe selaouet gand kalz a evez hag a joa. Beb an amzer an ograou a drohe ar han, en eur rei da gleved kaerra toniou or hantikou.

An Anjeluz, e peder mouez eo a glozas an abadenn-santel.

An dud, avad, a jomas er-mêz, dirag an nor-dal, hag ar ganerien a renkas dond adarre dirazo da gana kanaouennou, evel « A' hed an noz », « Gwir Vretoned » ha « Kenavo ». Amañ e tarzas ar strakadennou dorn, evel ar gurun. Meuleudi da Ganerien Bro-Leon. An hent nevez o-deus digoret a zo leun a bromesaou.

Or Mignoned.

Ganet ez eus eur paotrig, Alan e ano, e ti an D^r Tricoire e Kastell-Briant. Kinnig a reom dezafi ha d'e wreg or gourhemannoù laouen.

Skol-Hañv ar Bleun-Brug.

Dalhet e vo ar bloaz-mañ e Kloerdi Santez Anna wened, euz ar 25 d'an 31 a viz Eost.

Bleun-Brugou 1958

E 1958 a vezo greet ar Bleun-Brug :

- 1) E PONT'N-ABAD d'an 22 a viz MEZEVEN en enor d'an Intron Varia. (Bleun-Brug Kerne.)
- 2) E PERWENAN d'an 22 a viz MEZEVEN. (Bleun-Brug Treger.)
- 3) E NOAL-PONDI d'ar 13 a viz GOUERE en enor da Zantez Breiz. (Bleun-Brug Bro-Wened.)
- 4) E SANT-THEGONNEC d'an 20 a viz GOUERE en enor d'or Halvariou koz. (Bleun-Brug Leon.)

AR galonad

Ton : Pa oan war bont an Naoned.

Pa oan er gêr e ti va zad,
En tu all d'ar stankenn,
D'ar merhed koant e oan deut mad :
Mond d'o gwel'd a ranken.
Ken liez ha bemde,
Laouen e kanen d'ê
Soniou lirzin ha gê
Ha leun a garante.

Ha kavet 'm-oa eur vestrez koant,
Seder evel eul labous ;
Va halon oa joaiuz ha drant
Gand va 'flah dibikou.
Hag e kanen bepred,
Hag a-dreuz hag a-hed :
Euruz e vin, me 'gred,
Pa vo din eureujet.

Eun deiz 'yajom da glask kraoñ
E-barz koad ar maner,
Pa 'zeuas eno, braz ha skaoñ,
Mab hena an urcher.
Va mestrezig raktal
'Yeas gwall ruz he zal,
Hag eñ gand modou ral
He zaludi dichal.

D'ar zul, warlerh an overn-bred
E oan soñj d'he gweled.
Med eur zouezenn am-oa bet
D'ar pron pa oe kaset
Embannou ar plah kaer
Gand an urcher laer.
Ya, tapet 'oan bet louz :
Ha me d'ar gêr didrouz.

Goude 'r galonad am-oa bet,
Ez is da vartolod,
War an oll vorioù euz ar bed
Ruillet evel eur bolod,
N'em-eus ankouët nepred
Ar vez ruz am-oa bet,
Dizonet 'vid bepred
Diouz ardou ar merhed.

YEUN AR GOW.

BLEUN-BRUG KERNE e pont'n-abad

d'an 22 a viz even 1958
dindan paeroniezh an ao 'n eskob fave

ROLL AR GOUEL

— SADORN 21, da 21 eur.

Kanou en noz gand
« Kanerien Bro-Leon », Landivizio.
Sonadeg gand « Son ha Koroll », Brest.

— SUL 22 a viz EVEN.

Azaleg 8 eur, e Skol Itron Varia Garmez :
Kenstrivadegou.

11 eur 30 : Overenn-bred.

Kan gand Lazou Kana St-Loeiz, Kastellin, St-Youen hag al Likès, Kemper, ha Kanerien Bro-Leon, Landivizio.

14 eur : **Abadenn vraz :**

- 1) Koroll Son ha Kan.
- 2) C'horiva : Ar Vro-Vigoudenn.
- 3) Prosesion vraz.
- 4) Bennoz ar Zakramant.

AR BLEUN-BRUG EO GOUEL BRAZ AR VRETONED